

Garen ar Bris a vonjoure,  
 E bourg Caouen pa arrue :  
 « De bonjour d'ec'h-hu, Caouenniz,  
 Pretra zo a neve n'hoc'h iliz ?  
 — Garen, na gomprenomp netra,  
 Ni en asur, en quement-ma.  
 E man ar c'hleier o son tri miz-zo,  
 Hep ma zo den beo var o zro ;  
 Tri miz-zo e main er guiz-ze,  
 Hep ma neuz den touchet out-he. »

Garen ar Bris a lavare,  
 An nor var e vamm pa diore :  
 « Me vel, ma mamm, ez oc'h dilezet  
 Aboue ma c'hom-me partiet,  
 Rac var an treuzo a velan  
 E c'he leset ar iet da divoan. »  
 Pa antreaz ebars an ti,  
 Ar Vere'hes voa ouz e lieni.  
 A vriet'n'e vamm e croguet  
 Ha var ar plas ec'h e marvet!

AR MEMEZ TRA

Ar bed oll, eme Iann goz, a gemer eur stum fall,  
 Neuz chomet war an douar mann vel ma oa gwech all.  
 Paour kez Iann, c'hui zo chenched, dre a'oc'h deued da c'hriza ;  
 Mez ar bed a zo chomet memez tra, memez tra.  
 Goude al loar, ar stered hag ann devalijen,  
 Gand an heol bep mintin e par ar sklerijen ;  
 Barz ann oabl an alc'haeder a zao enn eur gana,  
 Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
 Gand he chupen erc'h skornet, pa zeu ar goan kri  
 Da c'hourda hon bizied ha da ruia hor fri,  
 Ann eil demeuz egile daou bried a dosta,  
 Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
 P'erru ann nevez amzer da c'head ar parkou  
 Da lakat bleun er balan, delio barz ar c'hoajo ;  
 Lagad ar merc'hed iaouank ive a zederra,  
 Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
 Ar yugale zo breman begek, beo ha seder ;  
 War meur a dra int gwiek arog goud ho *Fater* ;  
 Ann avalo hanyrued a blij d'he ar maia,  
 Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
 Ann diaoul a gollaz Eva bepred a zo temptuz,  
 Ar merc'hed koant zo ive atao bresk ha sentuz ;  
 Demeuz ar frouez difennet, kalz, siouaz ! a glanva,  
 Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
 Potred a weler bemde ho wapad ar merc'hed ;  
 Merc'hed a weler ive ho kaketal potred ;  
 Touet kalz, dere'hel neubeud, a zo ar e'hiz brema,  
 Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
 Nemed ar bragou toul-gwiz, al lero marellet,  
 Ar jeleten kov-iodek, ar hERRUKEN poultret,  
 Pez a chom a zo chomed ebarz ar stad ma oa,  
 Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra. (Proprieté.)

Lanhuon, en ti intanvez Ar Goffic, mouler-lerrev.